

MARO HA PASION HON ZALVER

FREUZ AL LONTEGEZ

WAR DON : *Paotred Plouillo (Barzaz Breiz) pe ar Samaritanen, pe Ele an Neuv deut d'an douar pe Ton a Basion.*

DISKAN

Hirvoudomp ouz troad an Oter,
Gant hon dasprener Jezuz,
A varv barnet gant ar mewier
D'eur zec'hed 'zo gwall-devuz.
True, Jezus, ouz lonkerien
Hon Bro ger a Vreiz-Izel !
I 'zo ho kwasan bourevien
Dre o lontegez marvel.

Gwad eun Doue 'ya da skuilhan;
Gant-an mesket ho taero,
Lonkerien, 'zo 'r kiriek gwasan
Deuz e boanio ken garo.
Pe 'c'h eo evit ho kovajo
C'houzanv hon Zalver breman
Dilezet ho mewentio
Bebet, marvet evit-An.

En Jardin distro Olivet
Kerz, mewier, war-lerc'h Jezuz ;
Sell mad, sell ouz Salver ar bed
En eur stourmad ken spontuz ;
Pa wel kement a hirvoudo
Kollet evit al lonker
Ar gwad sakr deuz e holl vempro
War an douar a ziver.

'Dalek al lontegez kentan
Euz hon tad Adam gwech-all,
Beteg 'l lontegez divezan
Euz ar vewerien ken fall,
War e gein o gwelan berniet ;
Pebez samm a bec'hejo !
Goude, mewier, bez estlammet
Mar skuilh kement a daero.

Mewier, te ac'h euz-han beuet
'Barz môr brein da evajo,
En-dro d'ean a teuz skoulmet
Eur gouriz a bec'hejo ;
Deuz da zastum ar berado
Demeuz ar gwad talvouduz
A zired evel pizenno
Deuz a galon zakr Jezus.

Judas a deu d'hen briata
Gant eun drem drant ha laouen
'Vit gallout, dre eur pok, gwerza
Hon Zalver d'ar Judevien ;
Evidoud ken gwaz falloni
Tostaat ouz e gorf sakr
Diweuz techet d'ar vewenti,
Mewier divez ha fallakr !

Tôlet eo Jezuz da gonnar
Bourevien gwaz 'vit bleidi ;
Ar re-man war e zrem dispar
'Sko tôlio ponner ha kri :
C'houi ive, lonkerien digar,
A dorn war drem zakr Jezuz ;
Hen taol a ret war an douar
Pa goueet 'n ho tech mezuz.

Da di Kaïfas eo stlejet
Gant soudarded ar c'hrisan ;
Te, d'as tro, mewier milliget,
A ro dorn d'e d'hen boutan ;
Pa varno an holl en eur rumm
Jezus e dro a gavo :
Ouz tarziou ponner e gurun,
Lonker, te hen anveo.

Endra ma pad e basion,
A beb tu eo heskinet :
Nac'het eo gant Per e vignon
Ha da estren kemeret,
Med eur zell kunv a-berz Jezuz
Rann e galon d'an nac'her ;
Te, mewier, gouel d'as tech heuzuz
Evel ma ouelaz sant Per.

'N ti Pilat hanval hen laker
D'an diwean torfetour,
Frankiz da Varabas mauntrer
A c'houlén ar bobl traitour ;
Dre dech fall al lontegez
Doue a zo dilezet,
Gwall-varnet eo ar zantelez
Ganid, lonker milliget.

Diwisket eo en noaz Jezuz,
Kreskin a ra o c'honnar
Ha, dindan o zaolio skrijuz,
Oan Doue 'goue d'an douar.
Dilezet 'ta ho tizurjo,
Mewerien, tud aheurtet ;
Evit gwalc'hi hoc'h evajo
En deuz e holl wad skuilhet.

Eur gurunen a spern garo
En e benn a zo zanket ;
Da vestr, da skouer a zo, bep tro,
Lonker, ganid goapeet.
Gouzanv a ra ar zantelez
Evel eun den a valloz,
Ha te, en kreiz al lontegez,
A zo kurunet a roz.

Sammet deuz e groaz ken ponner
E pign war vene Kalvar,
Enon gant eur galon dener
E ped ar Roue a c'hloar :
« Ma zad zantel, o fardonnet,
« N'ouzont ket petra reont. »
Gra 'vel-se, mewier kaledet,
D'an dud warn-out pa skoont.

Taget gant eur zec'hed spontuz
Jezuz 'lar : « Me 'm euz zec'het ! »
Ar vestl bag ar gwin-trenk devuz
D'ean a zo kinniget.
Te, mewier, gant da lontegez,
'Ro ken braz zec'het d'ean,
Deus 'ta, dre da dilontegez,
D'hen frealzin mad breman.

An dismeganz adkreskont c'hoaz
En eur grial warnean :
« Ma karfe disken, deus e groaz
« Zur mad e kredfemp ennan. »
En despet d'an tacho ponner,
Lonkerien, e c'hall disken,
Med e garante 'n ho kenver
En dalc'h stag ouz ar chaden.

— « Ho kroaz kalet, o ma Zalver,
Arabat eo d'ac'h kwitât :
Warn-i, chomet beteg amzer
Ho tiwean huanad,
Med beet ouzimp-ni truez,
Hon tennet holl daved-oc'h,
Trein reomp kein d'al lontegez
'Vit bewan, mervel 'vidoc'h ! »

Mervel a ra, hag ar bed holl
A doug kaon braz d'e grouer,
Te, hepken, mewier, ken diroll,
A gav 'n es kalon krizder ;

O lonker kri hag argaruz,
Ar gerrek a zo frailhet
Ha te, 'welet maro Jezuz,
Na vi ket c'hoaz goneet ?

Sethu aman, hon Dasprener,
Hon diwean pedenno,
Deus hon c'harante 'n ho kenver
Ec'h int holl testenio :
« Pa' c'h eo gwalc'het hon c'horfajo
« Ha torret hon lontegez,
« En hon c'halon, en hon sonjo
« Pep tra a vezo nevez. »

« O gwerc'hez gloriuz Vari,
« Tech fall hon mewentio
« An neuz beuet ac'hanoc'h-c'houi
« En eur mor c'hwerv a daero.
« Ganac'h da ouelan ra deump
« Ouz troad ar groaz prisiuz,
« Hag hon daelo ra unanimp
« Gant ho re, ha re Jezuz ! »

« Ma êl-mad, ha ma zant paeron,
« C'houi sant Erwan binniget,
« Touin 'reomp a greiz kalon
« Dirazoc'h holl daoulinet :
« Trein 'reomp kein d'ar vewenti
« Beteg finvez hon buez ;
« Da stourm hon zikouret holl c'houi
« Ouz tech fall al lontegez. »

PERSON TREDREZ.

IMPRIMATUR

Brioci, die 25^a martii 1901

M. LE PROVOST,
vic. gén.

